


CHOM ER GÊR *h*

*Mouez ar vamm
a zo mouez Doue!*

Ton nevez

All^o. Moderato




Ke - na-ve-zo va zad ka-ret kui - tât ar gêr zo em spe-red. E




Pa - ris 'ma an eü-rus-ted o c'he-dal ka-lon ar mer'ched.

Lento-gravê



An eü-rus-ted du - ze ka-vet, se - laou paour kêz Ja - ne - dik gant

rall.



kalz daë - lou a zo mes - ket, paour kêz Ja - ne - dik.

AR VERC'H

I

Kenavezo, va zad karet,
Kuitât ar gêr zo em spered.
E Paris, 'ma an eürusted
O c'headal kalon ar merc'hed.

II

E léc'h kaout dek real ar zizun
O labourat 'vel eur gurun
Aour hag arc'hant a c'houezin
Heb ober seurt nemed c'hoarzin.

III

Me a jencho va dilhad groz
Vaboutou "saout" va c'hoëf" mam goz"
Me vô evel eun dimezel
« Fin 'tailh, » evel eun darzunel.

IV

Em zreid vô 'r boutou ler melen,
Eun tok seizennet var va fenn,
Eur vantel voulouz var va choug,
Eur c'helc'h aour en drod'am gouzoug.

V

Me zilezo va brezoneg
Da zistaga bommou galleg.
Me gomzo flour 'vel eun intron
Ha va « accent » a jencho ton.

VI

E léc'h dour ha patatez fall
Yod kerc'h, anduilh ha souben zall
Me a zebro eun tamm boued fin
Hag a evo ar gwella gwin.

AN TAD

I

An eürusted du-ze kavet
Selaou paourkêz Janedik,
Gant kalz daëlou a zo mesket!
Paourkêz Janedik.

II

Aour hag arc'hant 'vez gounezet
Selaou, paourkêz Janedik,
Divar goust ar feiz, ar yec'hed.
Paourkêz Janedik.

III

Te vô evel eur « vorlarjez »
Selaou paourkez Janedik,
Ha petra deui da c'houdevez?
Paourkêz Janedik.

IV

Te vô henvel ouz eur marmouz
Selaou, paourkêz Janedik,
Gant e gorf vil hag e fri louz.
Paourkêz Janedik.

V

Gant da c'halleg a c'hiz nevez
Selaou, paourkêz Janedik,
Te vô dismegans arbarrez.
Paourêz Janedik.

VI

Hor bevans-ni zo dereat
Selaou, paourkêz Janedik,
Da rei d'an den eur stomok mat.
Paourkêz Janedik.

VII

Du-ze 'kavin al liberte
Da dremen ar zul em giz-me.
Me bourmeno va c'halite
O c'haloupat a hed an de.

VIII

E léc'h offern ha gousperou
Me a redo dan ebatou
Pa deni an noz me a zanso
Ac'han ma teui an deiz en dro.

IX

N' ran ket a van eus ho komzou,
Ho klemmou nak hoc'h hirvoudou.
Kenavô, tad, kenavô 'ta !
Mall bras am eus da gimlada.

X

Daoust petra dremen em ene
Petra glevan, ô va Doue
Eur vouez a zo ouz va gelver
Hag a lavar d'in : « *Chom er gêr !* »

XI (1)

Mouez va mamm a zo mouez Doue
Ra vezo grêt e volonte
O va zad kez, pardon, pardon
Da veza rannet ho kalon.

VII

Ar zul eo dervez an Aotrou
Selaou, paourkêz Janedik,
Evit maga hon eneou.
Paourkêz Janedik.

VIII

Ne 'z eus nemed ar merc'hed fall,
Selaou, paourkêz Janedik,
A yafe en noz da zansal.
Paourkêz Janedik.

IX

Pa vi ét kuit, piou a glozo
Selaou, paourkêz Janedik,
Va daoulagad pa vin maro ?
Paourkêz Janedik.

X

Te glev mouez da vamm benniget
Selaou, paourkêz Janedik,
A zo diskennet er v red.
Paourkêz Janedik.

XI

Kalon eun tad, va merc'hik ker
Selaou, paourkêz Janedik,
Da rei ar pardon a zo têt.

EUN TAOLEAD.



(1) Ar verc'h a gouez d'an daoulin dirak he zad.

Ar werz-man a zo da veza kanet etre daou arvest, en eur pezh-c'hoari. Eur pôtrik bihan ouz red a c'hello kemeret plas ar plac'h yaouank. An diviz-man a dremen en-ti. A-zioc'h an oaled, var ar chiminal e weler portred ar vamm.